

Doull 15 Mars 1892



An  
En  
Ec

613 A /

**EXEMPL  
HA PUNITION**

*Eus a eur Plac'h Yaouanq, pehini e  
dens bet ar grueldet da lazar e Jévar  
C'hrouadur, condaonet da veza crou-  
guet ha dévet ar guér a Roazon.*

*Var eun ton nevez.*

**S**PERET SANTEU, m'ho peb da rei din al tonnier,  
Ar c'haç da gomposi eur Vers spirituel,  
Eun exempl a zo guél drist had eur meleour patant,  
Ma rei reflection varni an dud yaouanq.

*eun skouer a zo*

Er bloavez mil seiz cant tri ha daou-uguent,  
An deuret a vis du, evit rêi da entent.  
En escopti a Roazon, en dreo euz a Zant-Cloda,  
Ec'h éruas eur malheur a ra d'an oll crena.

Eur femelen yaouano, a lignez enorabl,  
Eus a dud pinvidic abers man, abers tad,  
A hanas daou vuguel ; er moment e voe tentet  
D'o etrangli o daou, hep beza badezet.

O c'heuil eur guzul fall e gemeras eur bal,  
E yaz da gorn ar parq d'o flan qa en donar ;  
Mes Doue oll bussant en devez bet permetet  
Dre eun aneval brutal m'e ar c'hrim auavet.

Retorn a ras d'ar guêr da guz he fallenti ;  
He zad he remerqas hac a c'houlas outi :  
Va merc'h pelec'h oc'h-u bet ? goal chenchet  
bras ho covàn ;  
Diouz al liou a zouguit e seblant ez oc'h clan.

Respont a ras d'ie zad gant eun ér indifferant :  
Me a vezo exempl da galz a dude yaouanc ;  
Va buez a verito beza partout publiet,  
Ma rêi reflexion varni calz a blac'het.

He zad ouz e c'hlèvet a ras reflexion  
Var he oll broposiou a douche e galon.  
Hâ possubl ve ta, va merc'h, et ven bet ouz he  
mezur,

Em be eur c'hrouadur da rèi din displijadur !

Da ben pevar devez m'e doa grêt he zorfet.  
He zad a yas d'ar parc da guerc'hat e loened :  
P'antreas voe estonet o velet eun aueval  
E tenna'n daou vuguel ermès eus an douar.

Eus a zeis crouadur e deuz bet va freid,  
Ne m'us nemet unan oup ganti glac'harèt.  
Lavaret ma e voa dia em bije sur calonat  
Diouz va merc'h libèrtin, abret pe divezat.

Redec a ras d'ar guèr n'eur goler ar vrasa,  
Ma qemeras eun hach en avis he laza ;  
Mes pa zonjas sqei ganti, e æl mat e inspiras  
D'arrèti e goler, hac e verc'h a dec'has.

Qüittât a ras an ty da vit e daou buguel,  
Hac o facas o daou ebars he davancher,  
Hac en em rentas gante e ty'n autrou Senechal,  
Da zisclèria deàn he zorfèjou barbar.

An autrou p'e c'hlêvas a voe bras estonet,  
A chomas ouze dol evel den mantret,  
Ar bluen demeus e zorn a goeas crac diganta ;  
Pa vel an daou vuguel e commanç da vouela.

Penos, miserables ! ec'h eus bet ar galon,  
Da laza daou vuguel hep caout compassion !  
Eur bunion guëll vras a c'heus-te meritet,  
Hac a vo hep dale ec'h enep prononcet.

An autrou Senechel a gommand d'eur serjant  
He laqat er prison neuze souden vatant,  
E güer a demeus Roazon ha dindan setiec devez  
E voe grêt he arrêt ha jujet he froces.

Pa voe interrojet, ar justic a estone  
O clêvet ar plac'h-ma e tislêria he bue  
O velet peguer secret e cuze he oll c'hrimou ;  
Nemet puissanç Doue n'an aye anezo.

Eus a bemp crouadur a meus laqet er bed,  
Nemet unan zo heo ; pêvar e meus lazet :  
Den sur n'en deveus santet va oll c'hrimou  
Nemet sur an daou-mâ en deus gouezed va zad. [execrabil,

Ar c'henta meus e qichen qer Vitre,  
A dolis er rivier pa eoe gabet gane;  
Hac an eil a voa maro a ben ma teuas er bed,  
A blantis er bern teil en parc va amezec.

Ha nemet an drede zo chomet en bue;  
Entre Kermaria e voe ganet gane;  
Er c'hassis prest d'ar porcher, bac eno e voe cavet  
Gant daou zen ancien o tremen ar vèret.

Neuze voe condaonet da veza disviqet,  
Laqet en he c'herc'hen eun invis roussinet,  
Hac an amand enorabl a rincas ive da ober  
Gant eun toreh allumet dirac ilis Sant Pêr.

A dal ilis Sant Pêr bete ma voe rentet  
En qichen ar potañ true e voe c'hlêvet  
O ouela, o teplori, o c'houlen digant Doue,  
Euc a greiz he c'halon barados d'e ene.

Cri vije ar galon em Roazon na ouelje,  
O clêvet ar plac'h-man penos e prezegue;  
Ha pa bignas d'ar potañ e c'houlennas an amzer  
Da instrui'r yaouanqiz he assiste d'avervel.


Das ben va c'hoezec vloas e voa bet debochet  
Gant diou plac'h libartin hac o c'hamaradet,  
Ma yeh me bannos ha dlar bal ha d'an nançou;  
Va mallos a bedan gant an nep a heuillo.

Tadou, hac'houi mamou, mestrou ha mestrezet,  
Instruit ho pugale hac ho tometiqet,  
N'o lezit qet da vonet da nep seurt assamble  
Na vezo tud honest en compagnez gante.

Me zo hirio, sivoas, meleour digor franc,  
Diouallit diouz ar bed, entrezoc'h plac'het yaouanq;  
Pedit Doue d'ho sicour hac e Vam sacr ar Verc'hes  
Da bellât diouzoc'h ar goal compagnez.

En em recommandi a ran d'ho pedennou ;  
Pedit Jesus dre e c'braç d'am receo er joayou ;  
Mont a rancan d'ar maro, pa e meus er meritet,  
Pardon a c'houlennan ouz qement zo o clêvet.

E Montroulez, e l'ave.



## REFLEXION

12  
ENTREZOC'H, tud yaouanc qement zo o clêvet,  
Comprenit er maro zo din-me preparet;  
Evit va oll bue fall ha va dizoboissanc  
En ranqan mervel mezus, sivoas, ous eur potanc

Me zo eur plac'h certain a voa elevelt mad,  
Disqet e pep feçon gant va man ha va zad;  
Demeuz a zeiz crouadur iut am c'harle ar muia,  
Ma ra breman deze var o zreid dizec'ha.


O ren va unec vloas e voent-me receyet  
Gant person va farres, gant enor ha respet;  
Da ober va c'homunion etouez ar vugale;  
Pemp bloas e meus bevet en carantê Doue.

(1) ouz ar grouk

Quittât rân ar bed-màn leun a dristidigez ;  
Va Jesus adorabl, ho pet onzin truëz ;  
Mervel tin ouz eur potañ, ha val' horf paour vo d'evet  
Al ludu améan gant an avel stringet.

Comprenit va bue, entrezoc'h, bugale ;  
Oboissit d'ho tud, balamouz d'a Zoue ;  
Hac e vezo sur eon deiz oll da vea curunet  
Gant Jesus en e c'hloar en pales an Dindet.

FIN



---

E Montroulez, e ty L'ANOE, ru ar Pave.